

YF_0090_Margodig La Boissière

Cette chanson raconte les amours malheureuses de Marguerite de La Boissiere (1768) en Plougonven, près de Morlaix avec un clerc que ses parents repoussent Lorsqu'elle fut enlevée, son ravisseur était avec son père buvant un coup à sa santé.

'N or evo beb e vanah me laren d'o yehed
Aotrou ho merh Margodig a fell din da gaoued.
An intron a oa prezan ma respon prontaman:
- Ma merh-me n'eo ket maget evit mab ur peizant.

He zad a zo den-jentil he mamm a zo intron
Margodig zo dimezell plah a gondision.
Margodig zo dimezell e maner Lamboucher
Ma gredan ket eman maget evid mab ul labourer

Erru an aotrou er ger daon zo bet anonsset
O gand e verh Enorig, Margodig zo kollet.
Neuze e zavet ar vurch partout tre e noblans
No chom na krow na karti deuz en apartenans.

Ne chom na krow na karti na kam na marchosi
Klasket e ve Margodig beteg kamb ar houldri.
Klasket e ve Margodig koulz en neh evel d'en-traon
Beteg poull rod ar vilin ma zellaz en aotrou.

Neuze e lar an aotrou: poent eo deom finissan
Zonet eo kloh en houarn poent eo mond da goanian.
Ha neuze n'om gontinu penes e vezogreit
Hag e skravez di yonted ha di moerzerezed.

O ti i moerzerezed Margodig zo kavet
Pe oa erru barz ar ger d'he zud neus lavare:
- O na gwelloh ez eo du-man bezan gwreg d'ur peizant
Evid bezan gwreg d'un aotrou mar ne ven ket kontant.

Aet eo Margod d'ar gouan ha hi gwisket en gris...
Me ya breman war he lec'h beteg koad ar markis.
Koad ar markis me a vo evel d'ur chachouer dall
Stennet e ma laso me ved en tout de vail.

En buvant chacun un coup je disais à votre santé
Monsieur je voudrais votre fille Margodig
La dame qui était présente répondit promptement:
Ma fille n'a pas été élevée pour un fils de paysan.

Son père est gentilhomme, sa mère Dame
Margodig est Demoiselle fille d'une certaine condition
Margodig est Demoiselle du manoir de La Boissière.
Je ne crois pas qu'elle ait été élevée pour un fils de paysan.

Lorsque Monsieur revint chez lui sa fille
Enori lui annonça :- Margodig est perdue !

Alors le Monsieur dit: il est temps pour nous d'en finir
La cloche en fer a sonné il est temps d'aller diner

Margo est partie au couvent vêtue de gris
Moi je vais maintenant à sa suite à la forêt du Marquis
Là je serai comme un chasseur aveugle.
J'ai tendu mes arcs, mais tous en vain...